


Breman 8, ru HOICHE 35000 ROAZON

10 lur

# bremañ

kazetenn ar stourmen e breizh

C'HWEVRER 1985 Niv 4



**AL LABOURENEN HEN DUAR**

Fanch MIT TRO WENN E BREIZH

◀ HAGA'R BROTOU PAOUR









MESK-DIVESK

**N**ann, Yann, n'on ket digristen pe enep kristen rik. Hiriv, n'emaon ket o vont da fentigellañ war veaj ar Pab e Bro Venezuela, pe diwarbenn an doktorelezh a zo bet roet da Sun Myung Moon, pe diwar-goust ar gatoliked feuket gant film nevez Godard ("Je vous salue Marie"). Hiriv e fell din ober bruderezh evit ur gasedig a zo bet savet gant beleien (da vezañ prenet e "Ti L.Malle" plasenn an Iliz 35510 Cesson-Sevigné). Anvet eo : "Doue roc'h'n roll" ha setu amañ un tañva eus ur ganaouenn : "Ugent vloaz ; ne fell hel din mervel. Ha houl-skoude e vezañ lazhet gouz-dik gant an dilabour. Ne welan den o vousec'hoazhin tro war dro. Piv a lavaro din : "dont a rez ?" Te Doue, Doue sod, Doue roc'h'n roll, Doue hanvedenn"... Arabat deoc'h c'hoar-zhin.

**M**arteze eo bet desket e vicher gantañ pa oa soudard. Dont a ra brav gantañ. Gant piv eo bet skrivet ar sonmañ : "Hent Mitterrand, Hent an w-hialouriezh, o go hent an go-ariv, yen ha sec'h. Gantañ e rampomp, hag ur wech ez aimp d'an tavad. War-lerc'h gouarv ar sokialouriezh, deomp ni da c'hervel hañ an spi. Hag a vo brav ha tomm, hag a lako ar Frañs war an hent da c'houl-nit adarre".

**A**N ORIENT eo ar gêr gantañ er Frañs evit pezh a sell ouzh mervel diwar an alkoolegezh. Warlerc'h Lens, Bethune ha BREST. Gant NAOMED ha BREST ez a ar maout evit ar pezh a sell ouzh an torfedou e Breizh : 18 % ha 12 % a gresk e 1983. Setu da nebeutañ si-frou ar polis : o kemer da zigarez ar c'hresk-se e vez goulennek kreskiñ niver ar boliserien. Met pa gresk niver an torfedou ha felladennoù gwelet gant ar polis ha tapet an aozerien anezho, daoust hag en n'eo ket abalamour na kresk niver ar boliserien ?

**G**oulenn a rae Jean MORAND (48 bloaz), 1000 lur digant an ASSEDIC evitañ da bre-nañ un dormad binviñ da labourat. Dre ma veze nac'het outañ e oa deuet d'an 21.3.84 da derriñ pep tra e ti an ASSEDIC, e straed Dupont des Loges e Roazhon : 681 000 a lurioù reuz. Kondaonet eo bet da zaou vloaz toullbac'h gant sursis, ha ret dezhañ labourat da beañ e zleou. Penaos e raio ???

**E**chu an abadenn gant JULIO IGLESIAS er Rex e Paris abaoe ar 27 a viz Genver. Ha gwelet e vo e Breizh ur wech bennak ? Klevet e vo da nebeutañ peogwir e vefe klevet unan eus a ganaouennoù pep c'hwec'h munutenn war radioioù Europa, Afrika, pe Amerika. Daoust hag en e chom c'hoazh er bed ur vro pe ur bobl dijulio ?

Pebezh awen ! Setu gant ur barzh nevez : Valery Giscard d'Estaing. Skignet oa bet ar varzhoneg gant krennarded da geñver pourmenadenn Mitterrand e Roazhon d'ar lañ a viz C'hwevrer. (ar re a fell dezho kaout an destenn c'hallek a c'hell skrivañ da v-Bremañ).

**T**amm-ha-tamm e sav bec'h diwer boblou an U.R.S.S., hag ec'h astenn ar frankiz he c'hrabanou eno memestra : n'eo ket vodka hepken a c'hell-lo evañ ar Soviediz pa savo c'hoant dezho lidañ ar sokialouriezh, met Coca-cola ivez azalek bremañ. Keloù mat evit Svetlana ALLILOJEVA, merc'h STALINE, distroet en he bro c'henidig warlene. 270 milion a dud dieubet ! Daoust hag en e chom war hon tamm douar patatez ur vro pe ur bobl digoka ?

**G**ant CHEVENEMENT, Ministr an Deskadurezh, ne vez kaoz nemet eus Skol ar Republik : "Paliou ar skol a zo araokadur an holl ha dibab ar re wellañ" emezan.

Nevez 'zo, koulskoude eo bet embannet gant an I.N.E.D. ne vez tizhet klas diwezhañ an eil derez nemet gant 14 % eus bugale al labourerien (hag a zo 45 % eus ar vugale dindan 16 bloaz)e-kichen 74 % eus bugale ar familhoù pinvidig.

Ma n'eo ket tra-walc'h, Chevenement, sell war-du bro Japan : eno 'zo bet ijinet gant an embregerezh Majima ur benveg da vroudañ ar vugale da labourat muioc'h ha pelloc'h : un tog-houarn eo, a darzh ur c'hwitteladenn dioutañ pa vez ar bugel o semplañ gant ar c'hoant kousket dirak e gentelioù : " Peder eurvezh kousket, BERZH (en arnodennoù) ! Pemp eurvezh, KOLL !" a lavar al lugan bruderezh.



**C**HEVENEMENT gwashoc'h evit HABY pe E. FAURE. Ha BADINTER gwashoc'h evit PEYREFITTE ? En tiez-toullbac'h Broete ? Ha oa 41131 prizoniad e miz Ebrel 1981 hag ouzhpenn 44000 zo bremañ (an hanter anezho divarn), daoust ma n'eus plas nemet evit 30 000 den. Piv a vo souezhet gant ensavadegoù an Nevez-Hañv ?

**D**'an 3 a viz Genver diwezhañ eo bet dalc'het e Dinardz emvod an "Association de Défense de la langue française" dindan arlevierezh an Ao. Yvon BOURGES, senatour-maer. Distaget zo bet ur brezegenn gant an Ao. TURIER, an danvez anezhi o vezañ : yezh ar soudarded, o zroioù-lavar ken war dachenn ar velestradurezh ha war hini an emgann, meneget eo bet ivez ar gerioù o tont eus ar broioù estranjour. Setu o tiwanañ dirazomp ur skiant gozh war ur boblad ken kozh all : tudoniezhan arme.



STAJOU TREGLONOU

**S**TAJOU BREZHONEK. An holl stajou, estregret ar re merket gant ur strennig, a vo dalc'het e brezhoneg penn-da-benn.

- 25-01 Meurzh : Staj brezhoneg (pep live) -(\*)-
- 02-03 Meurzh : Dibenn-sizhun dañs ha kan ha diskann.
- 23-24 Meurzh : Dibenn-sizhun luc'hskeudennoù.

9-10 C'hwevrer : Dibenn-sizhun brezhoneg kenaozet gant Skol an Emsav (pep live) -(\*)-

ERRATUM SGEN-CFDT breman niv.40

Gant SGEN-CFDT ar Morbihan hepken eo bet votet ar mennad-skoazell da H. ar Bihan hag I. Kadoret. Kevrenn Penn-ar-Bed avat a nac'h votañ kement a denn d'ar brezhoneg. Perak ?

Gant ar bodad-studi war ar Yezhoù Bihanaet er SGEN-CFDT e vo aozet ur staj d'ar 14.15. ha 16 a viz Meurzh war an amzer labour, en Oaled Diwan e Treglonoù. Ar re a garfe kemer perzh a c'hell pellgomz da OALD DIWAN (04.05.42)

FESTOU-NOZ PILHOU

**G**iz bep bloaz vo ur fest noz pilhoù (treuzwisket) ha Bannaleg (sal ar Gouelioù) d'an 2 a viz Meurzh. Kaset vo an traoù en dro gant SKOLVAN, bagadoù Brieg ha Bannaleg, Kanerien ha Sonerien... Ar gounit a yelo da ZIWAN (just e-vel just).

**G**iz bep miz vo ur fest noz gant skoazell Diwan Roazon ha kreizenn SAE Roazon e MJC la Paillette, d'ar Merc'her 20 a viz C'hwevrer, ur fest noz PILHOU 'vo tem ar fest noz ar wech-mañ. Kaset vo en dro gant kanerien, sonerien Breizh Uhel, hag ar strollad LEI21G.

BREIZH E SKOLIOU BRO SAOZ

**U**r plac'h yaouank 15 bloaz eo Diana Masson. Mont a ra d'ar skol eil derezh e Stevenage. Eviti eo ar bloaz-mañ bloaz arnodennoù fin ar skol. Tremet a raio C.S.E. (Certificate of Secondary Education) ha 'O Level (Ordinary Level). Pep skoliad a choaz etre 7 ha 9 danvez : saozneg, galleg, istor, douaroniezh, skiantoù an natur h.a

dro. An arc'hant dastumet a vez kaset da Vreizh da skoazellañ ar stourm evit ar yezh.

Unan eus an danvez choazet gant Diana a zo ar c'hoar-riva. Evit he CSE C'hoariva he deus savet ur pezh-c'hoari evit ar skingomz. Ma kontan kement-mañ deoc'h eo peogwir he deus kavet Diana Masson danvez he fezh-c'hoari e Breizh : an emsav evit ar brezhoneg. "Ar Floderien" eo anv ar pezh-c'hoari. Berr ha berr : ur vilajenn vihan war vord an aod e Kerne Veur hag eno ez eus tud o flodañ gwinn mat hag evajoù lipous eus Breizh gant ostalariezh war

Aet oa Diana da Vreizh. Klevet he doa brezhoneg komzet gant tud ar vro hag en em c'houlennet oa petra e oa ar yezh-se ken disheñvel diouzh ar galleg.

Arabat bezañ souezhet o welout skolidi Bro-Saoz o tiskouez dudi evit Breizh hag ar Brezhoneg. Danvez deskiñ eo evit an arnodennoù. Bep bloaz evit ar re a gemer galleg e vez goulennoù war ur rannvro ha Breizh a zo dibabet da vont war roll an arnodennoù. Ret eo d'ar skolidi deskiñ un tamm istor, douaroniezh, stad al labour e Breizh an emsav evit ar yezh hag ar stourm politikel.

Janig Stephens.

Lennit al liamm

BREMAN NIVERENN 41

MIZ C'HWEVRER 1985

TAOLENN

LIZHIRI 2

LEVRIOU BREMAN 2

SOKIAL

TRO WENN EVIT BREIZH 3

S.C.E.T. BREIZH 3

STOURM

NA FORANIT KET HO KWIR 4

KUZUL SEVENADUREL 4

SOKIAL

A.S.A.V.P.A. 5

HO TAILHOU E BREZH. 5

PELLGOMZ 5

AR BED O TREIN

"SURVIE" 6

KANAKI PEGOULZ 7

RADIOIOU LEC'H 6-7

TAOLIOU PLOENN

LIZHIRI YANN BISMIG 7

DUDI

BERR HA BERR 8

FILMOU HA BREZHONEG 8

C'HOARIOU 8

FILMOU NEVEZ 9

TENZOR AN ENEZENN 9

KEMENNADENNOU

MESK-DIVESK 10

KELETER 10

Ar veketenn gant Il Killeverre Silvi Doornart, Mikael Baudu, Lena Louarn.

Ar pennadoù gant Martial Menard, Yann Pennaleg, Mikael Baudu, Lozen Goulaouer, Tariq Louarn, Mark Kerrain, Y'farch Jacq, Mikael Madeg, Iwan Couee, Garan ar Meur ha Charig Stephen.

Luc'hskeudennoù gant A.J.P. O.F., Le Marchand, Tine.

Tresadennoù gant Gégé, Malo Louarn, Plantu.

Renerez Bremañ Silvi Doornart

Moulet e ti Moulerezh Al Iisoù-15, st. ar Moneiz- Roazon

Koumanant bloaz 96 lur

Evit 6 miz : 50 lur (6 niv) da gas da BREMAN - B, straed Hoche-35000 Roazon

**KOUMANANT**

**BLOAZ**

**12 Niv**

**96 lur**